


ivier 220 h/

AUTROU LOCHRIST AN IZELVET



BEZIT SONCH EUS AR VRETONNED

e Landerne, e ty J. Desmoulins, ru Lafayette.



CANTIC

LOCHRIST AN IZELVET



Var ton neve : *Quadri.*

Dre c'hraç Autrou Doue an Tad,
Hac inspiration an Æl-mad,
Hac ar zicour eus ar Verc'hez,
E carfen compos eur verz nevez.

Abalamour d'eur Plaç santel,
A zo ebars en Breiz-Izel :
Mar qerit donet de güelet,
N'ho pezo qet amzer gollet.

En escopti còs a Leon
Eus eur plaç a zevotion,
E Güinevez ma ententet.
Ebars Lochrist an Izelvet.

Güechal, en amzer ancien,
E Lochrist e voa eur feunteun
Pini a voa darempredet
A bep brò gant pelerinet,

Mes, mar entendit Bretonet,
Lee'h e voa da vont d'e guelet.
Dre ma rè ur miracl bemde
An den demeus ar feunteun-ze.

En eul laouer ven zo eno,
E gueret Autrou Christ ato
E laqet an dud affliget,
Gant an dour anezi goalc'het.

Deus ar feunteun-ze cundue
Eur gorzen gaër hag a dole
An dour en eur zail, p'er c'herc'het,
Gant enor bras en assistet.

Gant eur bêleg guisqet en gūen
Ar saor, ar stol en e guerchen
A yê bemde da assistan
Guelc'hi el laouer an dud clàn.

Ia, diouz renq eun den bemde
Vije laket er laouer-ze ;
Rac dre c'hraç ar Christ benniguet
Oll e recevont ar iec'het.

Ne get fablou eo an draman ;
Ar wirionez a lavaran :
Qement a vije affliget
E Lochrist a gave yec'het.

A fin kaer e voe carguet

Hac endro dezi assuret
A lojennou d'an affliget ;
A bep brò teu pelerinet.

Ho monet tud eus ar c'hontre
Timat da c'holo'r feuteun-ze
Gant aon ne deuze ar guernez
Er vrò hac er c'harter ivez.

An Aotrou Christ a bermetas
Gòlo e feuteun dre e c'hraç
Dindan an douar en Iliz,
Elèc'h ma er peder bemdeis.

Abaoue e zeo ranfermet,
Gant cals a dud bet dilezet .
Gousconde e zeo ur plaç santel,
Mar deus certen en Breiz-santel.

En eur laouer ven zo eno
E zeus grêt, calz a dud salo ;
O pedi ar Christ beniguet,
Soulajamant a zo bepret.

Pa viot en affliction,
Deut da Lochrist a vir galon,
Eno zo remejou excelant
D'an dud languis hac important.

Evit beza bet dilezet
Gant calz euz a belerinet,

E zeo hi an ancienna
Eus plaçou santel ar vrô-mâ.

Evit compren ar miraclou
Zo grêt hac e rër c'hoas ato,
D'ho lavaret ha d'ho scrifa,
Eur mis anter ne deo netra.

Mes c'houi Autrou Christ benignet
Roit scêrijen d'am speret
Da zislêria d'ar Vretoned
Darn ar miraclou oc'h eus grêt.

Commanç a ran d'ho recita,
Gant graë ar Verc'hez Varia,
Ha va Æl-mad am inspiro,
Mar plich gan eoc'h dont d'ho zelao.

En Lochrist eun amzer zo bet,
Eun ozac'h a voa aplacet,
Hac e bried a vir galon
A roe d'ar paour aluzen.

Gouscoude eun devez a voa,
Ma carfac'h entent an dra-ma,
Eur paour o clasq an aluzen ;
Eun dra horubl eo da gompren.

En em gavas e ty an dud-mâ
O clasq eun dra evit beva,
Abalamour da Zoue e c'houlen,

Hac evit e vuez asten.

Pegusement charitapl ma voant,
Ar vreg neuze voe arrogant
Ouz ar paour-qèz-se a c'houlén,
En han' Doue an aluzen,

E monn güel bresset, emezi,
Oc'h oza boued da dud va zy ;
Eur vech all me ho soulajo,
Evit breman hit en tro.

Ar paour qèz, evit qement-se,
Ato bepret a c'houlénne :
Roit d'ia eun tam boued emezàn,
Rac c'hoant debri a meus brèman.

Güell bell-zo ne meus tam debret,
Va c'halou zo a gôs serret :
En han' Doue, va soulajet,
Pe e varvin amàn assuret.

Ar vreg a lavaras dezàn,
Gant ar goler an horruplàn :
It eus va der, pe m'ho casso,
Hac ar c'hi bras me zistago.

Antre a eure en coler,
Distag ar c'hi en bèr amzer ;
Mes ne ra drouc ebet deza,
Ne ra qeu nemet e c'huessa.

Cetu ar paour o huanada
Hac e galon o fatica
O velet an ingratiri,
Ne gave den d'e zoulaji.

Diouz d'or an ty e partias,
Dirac an nor bors e varvas ;
Daou guy a voa en e guichen,
Eun dra horrnpl eo da gompren.

Gant ar c'hi a voa distaguet
Eun all a voa en em gavet,
Hac a chommas d'e cherissa,
Hep touch e nep fêçon outâ.

Pa deuas tud an ty d'ho boued
C'ôs ha yaouanq voent estonet
O velet an den-ze marô,
Hep christen ganet var e drô.

Dirac an nor bors voa chomet
Corf an den paour-ze decedet,
Hac an daou guy en e guichen,
Eun exempl bras eo da gompren.

Pa glêvas ar vreg an dra-ze,
E vouele hac e teplore ;
Allas ! me zo caus, emezi,
Eus ar maleur hac an anui.

Ar c'hi bras a meuz distaguet

Hac ennes en deuz lazet,
Abalamour ma c'houlenne
Eu tam boued en hano Douè.

Dont a ra tud d'e visita,
Da c'hout petra voa êruet ganta ;
Eu nep fêcon ne voa blesset,
Prest goude voa sebeliet.

Ar vreg, o sonjal amandi
He fot, hep douet na melconi,
A roas evit e liena
Roched, lincet da vont gantâ.

O clevet ur malheur quer bras
Calz a dud en em rassamblas
Evit gêlet en enteri,
Gant calz a c'hlaç'har hac a apui.

Da Güinevez e voa casset
Da anteri gant peb respet,
Hi a bêas ar vèleyen
D'ober, servich gantâ ha peden.

Pa oe ar vreg er guer rentet,
Var e dol e deveus cavet
Hac he arc'hant hac e dillat,
Da goves e zeas timat.

Bèleg ebet ne absolvje :
Da Rom e ranqas mont neuze :

Da gaout ar Pab da gôves gantà
He fec'hejou, heo nac'h netra.

Ar binijen a acceptas,
Ha diouz he zud e c'houlennas
Goude-ze da vont da vele :
Va fried na zalein morze.

He fried a lavaras dezi :
Me yêlo qerqent a c'houi ;
Mar da unan, e zimp hou daou,
Ne meus qet damant da vadou.

Eur mad e devoa o tena,
Hac a embrassas da genta.
Hac he merc'h hena goude-ze ;
Adieu, emezi, va bugale.

Cetu int ho daou o partia,
O cass gante eun doublen vara ;
Pa oent êt pell eus ac'hane,
Tud en hent a êruas gante.

Ar vreg neuze e lavaret
Dirac an dud-ze de fried :
An arc'hant o poa d'in roet
Var an dol er guær zo chommet.

Va fried paour, it davito,
Er plaç-mà me ho teporto ;
Senti a eure prontamant,

Mont d'ar guèr da vit arc'hant.

Evel ma voent dispartiet,
Ar vreg a yeas en hent bepret,
Ha pa retornas er plaç-se,
Voa èt e fried ac'hane.

Hac en commanç da irvoudi,
Da vouela ha da zeplori;
Gant an anqen e oa goal vras,
D'ar guèr neuze a tistroas.

Goude' voent pemp pla var-nugent
Hep en em velet en nep hent,
Nac nep biscoas clèvent hano
An eil eus eguile anezo.

O veza ne gleve hano
Eus e bried, nac he c'helo,
Gant an amzer e temèzas,
Eus eil pried a euruja.

Allas! m'en divije guezet
E voa beo e genta pried,
N'en dev a ket gret an dra-ze;
Glac'har avoalac'h en d'oa goude.

Ar vreg en Rom pa eruas
Dirag ar Pab en em strincas
Da c'houlen outan pinijen,
Hag eus e fec'het absolven.

Ar Pab a ordrenas e c'has,
Evit e fot gant eun hast vras
Ebars er cambr ar binijen,
Ma laqet guell ar binijen,

Ha rei eno dezi neuze
Barra a dour evit tri de ;
Ha lin evit dont da neza
Epad tri de hep heana.

Bras eo madelez eun Doue :
En amzer e voe er gampr-se
Hep caout nep memor anezhi,
Ma sonjot voa maro enni.

Pa voe digoret varnezhi,
Voa ho neza, yac'h a disoursi;
Ma voe tennet euz ar gampr-se
Absolvét gant ar Pab neuze.

Goude eun den kos a gavas,
Humblamant outi a c'houlennas ;
A belec'h e teuit na ma zit,
Va mignounez, d'in livirit,

Biscoas me n'ho quelis amà ;
C'houi n'en doc'h ket eus ar vrô-ma
Ouzoc'h, den mat, ne nac'hint quet
A vreiz-lzel oun assuret.

Eus a Lochrist an Izelvet.

Eno emedi va fried.
Va pried ha va bugale
A meus me grèd glac'har dezhe,

Eus o beza abandonnet,
Me gret e carfen va guelet ;
Mar doc'h contant, me an den-ze
Da vonet d'o gûelet ive,

Abars nemeur. gant graç Doue,
Ec'h êrufot en ho contre.
Ho pried hac o pugale,
Soude e velot anezhe,

Hac ec'h alfot o c'honsoli
En o glac'har hac o annui.
Pa êrufot en Izelvet.
E t'in Autrou Christ beniguet,

Grit va gourc'hemennou dezan,
Ha lavarit da Christ er c'haran.
Me eo ar c'halvez en deus grèt
E imach pa zeo bet formet,

Eur voalen ven a meus amàn
Hac a roïn deoc'h bremàn
Ho pried hac ho pugale,
Souden e velot aneze.

Qerzat a ras qen excellent,
Ma teuas d'e brò prontamant,

E ty e zud en em rentas,
Ar voalen ven e c'hunduas.

Pa êruas e ty e fried,
E c'houlennas beza lojet
Gant respect hac humilite
Christen ganet n'e anaye.

Greg an ty a voa arrogant,
Hac a respontas prontamant ;
Evit amañ ne lojot ket,
It-u alesse pa guerfet.

He fried er guêr ne voa ket,
Hac e bugale o clêvet
O mam baour o c'houlenn loja
Ous o lesvan qen humbl ha tra.

Gant truez outhi e voeljet
Gant he bugale assuret.
Ia, en despet d'al lesvam-ze,
Repuet mad e voa ganthe.

Ar vreg paour-ze pa voa antreet
En he zy etal he fried,
Var eul laouer ven ec'h azezas,
Reposi enni a c'houlennas.

He merc'h dre ma teue a ma ze
D'e breur belêg a lavare ;
Gant ar vreg-mañ oun estonet ;

P'elgüelàn e meus poan speret.

Rac ar vam e deus or ganet
Ha c'houi a me, va breur bèleg.
A gavàn outhi henvel mad;
Qement e tom outhi va goad.

Emedo eno dirac an nôr ;
He mab a deu d'e c'haout gant enor
Gant respet hac humilite
E crogas en em neuze.

Da dal an tàm e voe casset
Gant e merc'h hac e mab bèleg,
Ma voe laqet da azeza
E plaç e mab e-nan gantà.

He merc'h dei neuze a voelc'has
He zreid gant humilite vras ;
Ha pa velas e gar merqet,
E lavaras de breur bèleg.

Va c'halon a lavar din bepred
Eo ar vreg-ma e deus hor ganet :
He gar zo ive cleizennet
Evel gar va mam assuret.

Ar beleg ne ra seblant ebet,
Qen a voe o c'hoan preparet ;
Mes neuze e roas e voued
D'ar vam e devoa hor ganet,

E lesvam o veza fachet,
E deus lavaret d'ar bêleg :
Ne rac'h qet d'in qement a stad,
Na qenebeut a rac'h d'ho tad.

Hep en em facha ar bêleg :
A eure e zever bepred ;
Ma commandas d'e c'hoar neuze
Caout soign mad demeus ar vreg-se

Digassit dillat, emezân,
Va c'hoar evit rei d'ar vreg-mân
Da chench, ma zayo da gousqet ;
Em güele e vezo laqet.

Rac evit feteiz ne gousqân ;
En orêson eu em laqan,
Ma vezo bolonte Doue
Ma cunduïn ervat va bue.

E c'hoar e devoe eur joa vras :
D'e armel ractal e qerzas
Da denna eun habit d'he mam,
Hac eun invis voa nevez flam.

Pa voa ar vreg-se habillet,
Ha dillad propr dezi güisqet,
E lavaraz e c'hoar d'e breur
Homân eo hor mam a dra sur.

Ar bêleg a respont dezhi ;

Me sonj din ive coulz ha c'hui,
Mes qemeromp paciantet
Gant an amzer a vo gouezet.

En guële mad e repositas ;
Homañ zo eur garantez vras
Etre ar vam hac ar vugale,
Abars finissa o bue !

P'oa'n ozac'h er guër êruet,
E lavaras dezhan e eil bried :
Eur mab bèleg oc'h eus amàn,
Hac a rè fiu vad, a gredàn

Eur vreg a zo amà lojet
Gant ho merc'h hac ho mab beleg,
En deus en e vele laquet ;
Ma n'am c'hredi, hit da velet.

An ozac'h paour vel ma clêvas
En coler er gampr e pignas.
Pen devoe güelet ar virione,
E c'houlèn euz e vab neuze :

Lavarit din, va mab bèlg.
Petra eo eta a sonjet :
Ne gavan qet mad an dra-man
Déoc'h-a na d'ho seurt, a gredàn

Epad ma voe en orèson,
Ha ma teue da douch e galon :

Tavit-u, va zad, emean,
Abalamour da Zoue er gran.

List va lesvam da lavaret,
Ar pez a garo da brezec ;
Nep a loj a vezo lojet ;
Ober ervad ato zo dleet.

Cetu an den-ze consolet
O clevet comz e vab beleg :
Buan ous traon e tisquennas,
Na droug ebed ne lavaras,

Antronoz vintin pa zavaz,
Ar vreg paour-ze gant eun hast vras
A yas da zivisqa he zillat :
Da rei de merc'h a galon vad.

Ar beleg d'e c'hoar a lavar :
C'houi oc'h euz kalz dillat, mer goar
Lezel a ellit ar re-ze
Gant ar vreg paour-ze'n han' Doue.

He merc'h e devoa calon vad,
Quercoulz hac ar bèleg e mab,
Ac a laras d'he man neuze :
Miret a ellit a dillat-ze.

Cetu oc'h ho zrugarecat,
A goulen neuze ouz he mab
Ac en vije e vadeles

Laqat an deiz-se o c'hoves.

Ia, emezàn, me ray se,
M'an be pouvoar me rae ive;
Pa deuy'r veleyen d'an ilis,
Me laqat certen ho còves.

Ho còves ha communia,
Ha goude' tijunfot amà,
O c'hortos au oferen-bred,
Em oferen neve ec'h assistet.

Ia, emei, assista a rin
Oc'h oferen neve a glêvin;
Mes communia na rin qet;
M'o po oc'h oferen celebret.

Reir e ve ar³ yun, emezan,
Marteze goude e verc'h clàn,
Communiel ha dijuniel,
Hir vo an offiç assuret.

Ne rin nac an eil nac eguile,
C'houi fel din am c'hommunife,
Goude m'ho pezo celebret,
Mar plich gauêc'h ofern-bret.

Var ze e zeont d'an ilis,
E mab a laqas e c'hovez,
Ma lavaras piou voa neuze
D'ar {beleg-se e c'honvesse.

Ar c'hovessour a voe secret,
Ar vreg-se ne zisclerias qet
N'en doe e mab oferennet,
Hac hi gantan commniet.

O veza ganti covesset,
Ha gant he mab communiet,
En orèson en em lakas,
Ha dan aotrou Christ e laras :

Gourc'hemennou oc'h eus emezi,
Digant unan dreist pepini,
C'houi, Autrou Christ benignet,
Mar plich ganeoc'h va c'blevet.

Digant eun den kos a bel bro,
En deus commandet din Autrou,
Lavaret deoc'k en ho carre
Ar c'halve pini oc'h eure.

An drede guech ma lavaras,
An autrou Christ a inclinas
E ben d'e beultrin assuret
Hac abaoue e zeo chommet.

Evit trugarecat ar vreg-se,
E ras an Autrou Christ an dra-ze,
A diskuez d'an oll dre e c'hraç
E voa ar vreg-se santel bras.

Ha pa voe he mab disquennet

Demeus an Auter beniguet,
Er sacristeri oc'h antreas,
Da zivisqa en em laqas.

Pa voa ouz en em zivisqa
Ar c'hôveseour a lar deza ;
Ar vreg oc'h euz communiet
Eo ar vam e deuz ho ganet.

Din-me he deuz hi lavaret,
Mes deoc'h-u ne lavar-je qet,
Qement ho gûelet chagrinet
C'houi hac ho c'hoar assuret.

Gant eun anqen hac eur joa vras
Da gavet e vam e teuas,
A voa oc'h ober orêson
D'an Autrou Christ a vir galon.

Evit merq an doublen vara
A voa bet ét gant ar vreg-mâ,
E voa ganthi lod anezâ,
Hep beza loed, qer fresq ha tra.

En he dorn e voa eur billet,
Den ne alle e guemeret ;
Mes pa deuas e mab bêleg,
En tennas eb dale ebet,

Er billet-se e voa scrifet
He buez antier het a het.

Pa lennas e mab anezàn,
Ec'h estone an oll ganthàn.

Allas ! va mam baour, emezàn,
Ignorant voàn a guement-màn ;
N'ouien qet voa c'hui assuret
Ar vam e deveus va gaaet.

Gant carantez a glac'har bras,
E varjont o daou var ar plaç.
O zud var al lec'h ne doant qet
Ar c'helou dezo voa casset.

E doant o prepari o boued
Hac an traou all voa dleet,
Evit rèi d'an dud da leina
Pa glèvjont oll c'hélou-mà.

He merc'h en instant ma clèvas,
Hac e fried tout a lezas,
Qement e voa en abandon
Gant glec'har bras en ho c'halon.

Pa edont o vont d'an Ilis
E varvjont o daou assambles
En creiz an hent dirac an oll
Mac'h estonet ar bed en oll.

Ous o gûelet er memes de
O vervel var o pevare ;
An tad, ar vam, ar vugale,

Homâ zo anqen gouscoude.

Prest goude voent sebeliet,
Evit ma vijent entêret :
Da Güinevez e voent casset,
Gant peb enor a peb respect.

Tri anezo eno !a chommas
Da entêri gant respect vras,
An ozac'h hac e vab bêleg,
Hac ar verc'h voa entêret.

Mes ar c'har m'oa ar vam garet
Pa èruos gant ar vèret,
Al loened cren a zistroas,
Den o arrêti ne ellas.

Ma laras an dud a ilis
O lezel da vont en o divis.
Elec'h ma plijo gant Doue
E vije entêret ar vreg-se.

Pa edont tost da borz ar vèret
Ebars Lochrist an Izelvet,
Al loened cren a arrêtas,
Hac ar c'har eno en o flaç.

Tennet e voe ar c'horf neuze
Eus ar c'har hep difficulte
Hac an dud voa oc'h assista
En ilis a zoug anezâ.

Ebars en ilis pa antreas,
An Autrou Christ a zisquezas
Ar plaç ma vije entèret,
Gant e viz d'an assistantet.

Eno e c'horf voe entèret
Gant peb enor ha peb respect,
E ty'n Autrou Christ beniguet,
Dindan e dreid e voe laqet.

Da ben nombr bloaveziou goude
E voe digoret ar bez-ze,
Hac e cavjot an arched enna
Qer yac'h evel m'a da guenta.

An arched neuze voe tennet
Eus ar bez hep caout drouc bet,
Hac abaoue e zeo chommet
E ty'n Autrou Christ beniguet.

Nep a glêvo an histor-mà,
Oc'h eus clêvet da recita
Zo crissoc'h egnèt an tigret
Ma na vez o c'halon touchet

Pa zay an dud paour da dal ho tor,
Respontit dezo gant enor,
Balamour d'an Au:rou Doue,
Memprou Jesus eo ar re-ze.

Roit a galon vad an aluzen,

Ha dalc'hit mad d'an oferen,
D'an œvrou mad, d'ar pedennou,
Ha Jesus ho recompanço.

Evin conclui ha finissàn,
A greis va halon ho pedàn
Da zont oll gant devotion
Da dy'n Autrou Christ d'ar pardon.

Eno certen eus religion
Eus ar re gaëra zo er vrô
A zo precius bras meurbed :
Diou vech ar bloa vezont douguet.

Da Bont Christ o c'hasser qonta
Da dy an Itron Varia,
Deiz gouel ar Mae ma entetet
Ha da vouel Christ vezont douguet

Rac-se eta ne vanqit get,
Dont da Lochrist an Izelvet
Vit gounit an induljanço
Ar bêvar a vis Guengolo.

Neuze màn ar solanite
Hac ar pardon bras er plaç-se
Roet eo demp da bedi Jesus,
Ma vezo ouzomp truezus.

FIN